



CONVERSION MARI-MADALEN.

Var ton : *Guez ar Gananéen.*

Martha.

Madalen, savit eus ho quele,
Da vont d'ar bredication ;
Jesus a sermon hirie adare,
Clevit en gant attention :
Bez en deus eur secret excellent ;
Da douch calon ar bec'herien ;
Pa vent qer calet ha diamant,
O rento tom demaus a yen.

En em habillit gant dilijanç,
Gant aon na vezac'h divezat ;
Tostait outa gant confianç,
Ha pomezit e gomzou ervat ;
Esper e meus e viot touchet
Qen ma finisso e sermon
Pe autramant eo ret lavaret
E zeo caledet ho calon.

Madalen.

Va c'hoar Martha, me yêl d'e velet,
Ha de glevet en e sermon,
Evit ma contantin ho speret,
Ha nonpas gant devotion ;
Me am bezo ar guriosite
Da laqat evez piz outan ;
Evit galloud goude quement-se,
Rei eur guir rapport anezan.

Jesus.

Eur pastor mad a goll un danvad,
En deveus eur c'hun bras dezi,
Hac a abandon ar vandennat
Evit mont da glasq anezi ;
Me vel unan so bet dianqet,
Hag a meus eur joa vras outi ;
Me e laqai etouez va denved,
Eus a lec'h na zianqo mui.

Ene superb, calon revoltet,
Evidout e teuan da sermon ;
Me a meus da velet o tonet,
C'hoant a meus da douch da galon ;
Digor an nôr d'ar Speret-Santel,
Hag en em abandon dezan,
Na zisclery pelloc'h ar brezel
D'ar graçou a c'heus digantan.

Madalen.

Jesus, va Mestr ha va guir Autrou,
Va c'halon oc'heus goneet ;
Me rei usach vad eus ho craçou
Pelloc'h endra vezin er bed.
Me ya da gütat va ornamanchou,
Va c'halon a santan mantret,
Adieu d'an oll gompagnunezou,
Ha da guement a meus caret.

Martha.

Petra eo eta, va c'hoar Mari ?
Hannes so eur chenchamant pront !
Perag e teut d'en em desoli ?
Ha den en deus gret deoc'h affront ?
Foula rit evel pa vec'h follet,
Hoc'h oll ornamanchou caëra,
Ha pa vezint ganeoc'h collet,
E ranqet adare prena.

Madalen.

Va c'hoar Martha va list da ober,
Jesus en deus va gonezet
En deus laqet en coler
Ouz ar pezh zo caus d'am pec'het
Me ne brein james mui biquen
Dillad eus a eur bris qer bras ;
Me zougno brema fris ha lien,
Ha nonpas satin na damas.

Ar c'horf-ma, p'ini zo bet ornet
Gant dillajou caër ha traou all,
Ne vezo pelloc'h mui goloet
Nemet gant ar c'hos dillad fall.
An douçer en deveus bet santet
O touguen vouloüs ha satin
A vezo evit biquen chenchet
Ebars en toliou disciplin.

Martha.

Ha possubl ve, va c'hoar Madalen,
E pe bet eur sort doneson !
Eur joa vras en bezo da vigen
Da peza galvet d'ar sermon.
Qê, red huan da vanqet Simon,
Ha lez an dud da lavaret ;

Gra offr da Jesus eus da galon
Dirag ar Pharisianet.

Madalen.

Lavared pepini a garo,
Me ne ran fors eus an dra-ze,
Jesus am c'har ha me e garo,
Mestr eo din ha d'am bolante.
Me voelc'ho e dreid gant va daëlon,
A zirag Simon hac e dud,
Hac a rai goap eus o sansurou,
Heq mez nag aon rag a goal vrud.

Va daoulagad, roet oc'heus daëlon
Da voelc'hi treid va medicin;
Ha c'houi, ma c'halon, huanadou,
Petra benag ma vec'h indign.
Va memor ho pet sonch aneza
E pep heur hag e pep momet;
Va bolonte tomit diouta,
Na scuizit qet ouz e garet.

Ar Pharisian.

Ma ve an den-man eur guir brofet,
E guis ma lavar sur e zeo.
Ne lesfet qet eur plac'h debordet
Da zec'hi e dreid gant e bléo,
Na ne lesfe qet tostât ountâ,
Na ne rae nep stad anezi;
Mes donet a rae d'a c'hanna,
Ha de chasseal eus an ti.

Ne deus ous e dreid frotet ongant,
Nemet gant design d'e laqât
D'e c'haret ha da veza contant,
D'ober anezi bepret stat;
Rag eviti da scuilla daëlon,
Daëlon tromplus eo ar re-ze,
A elfe servichout da laçou
Da dromplan an nep na sonchfe.

Jesus.

Simon n'anavez mui an vreg-mâ,
Ne deo mui evel ma zeo bet;
Eur galon bur e devezs brema,
Renoncet e devezs d'ar bod;
Disqi a ran d'an oll o dever;
Ha memes dide da guenta,
Qemer-hi evit eur milouer,
Deus da ober ar memes tra.

Na sonj qet did e ve criminel
Ar garantez e deus ouzin;

Comzet e vezo en aviel
Eus a guemend vad a ra din :
E c'hrimou so dezi pardonet
Abalamour d'e c'harantez,
Hag abalamour ma zeo fachet
Da veza gret fallagriez.

Qê, greg, en peoc'h, en patientet,
Da feiz en deus da c'hret salo;
Pardonet meus dit meur a bec'het,
Bez fidel betec ar maro.
Publi, en despet d'ar Judevien,
Penaus e c'heus cavet moyen
Da veza did da grim pardonet
Gant Doue, ar Mestr souverén.

Madalen.

Ah ! permetit d'ho servicheres
Da chom bepred en ho presanç,
Rac aon na ve qer maleuruses
D'hoc'h offanci dre inconstanç.
Nag evit ma ouezo ar Judevien
N'en deus caus da gconversion
Eus ar bec'heres vras Madalen
Nemet ho conversation.

Martha.

Autrou, n'hon eus biscoas meritet
D'ho recco ebars en hon ty,
Rag-se n'oun qet penaos e priset
Doat da renta bezit deomp-ni;
Commancet eo bet ar Judevien
Da barlant da vurmuri,
Abalamour d'am c'hoar Madalen,
Dre m'ho c'heus estim eviti.

Jesus.

Hervez o goal inclination
E teu ar Judevien da juji,
Ha dre eur speret ambition
E fell dezo va sansuri.
Ha ne ouzont qet ar medecin
A les an dud o deus vec'het
Evit rei da re a zo infirm
Soulajamant en o c'hlevet.

Eus a ene Mari-Madalen
Me meuz chasseet seiz clenvet,
Hep n'oar nicun eus ar Judevien
Pe feçon e meus int casset.
Ennon e lacas e c'honfiangç
Ar pez zo caos eus e vec'hed;
Ma na vez er medecin fizioanç,
E zeo dies bras caout remede.

Madalen.

Autrou, po c'heus bet ar vadelez
Da zonet d'hon ty d'hor güelet,
E zeo just d'emp-ni ar joa disquez
Hon eus ouz ho tiguemeret :
Mes grit d'am c'hoar Mari labourat,
Ne ra nemet ho contempli ;
Laret dezi n'e dê qet mat
Chom bepret da feneanti.

Jesus.

Lest Madalen bepret em presañ,
Beza meus outy carantez ;
Me estim he repos, he silañ,
Calz mui eguet ar pezh a rez :
Hi e deus grêt ar choas güella,
Ha den n'en lamo diganti :
N'eus nemet eun affe er bed-ma
Necesser da effectui.

Madalen.

Va Doue, va Mestr, va c'harantez,
Penaos eta rin-me brema ?
Grit ma varnin ganêch assembles,
Ha va zennit eus ar bed-ma,
Pa ho qëlan er groas o souffri,
N'allan qet miret da ouëla,
Ha p'ho qëlan en ho c'bangoni,
E teu va c'halon da ranna.

Jesus.

En em gomsol greg carantezus,
Me zalc'ho dit fidelite ;
Ne vezo qet collet did Jesus,
Dond a rai da gaout adare ;
Destum pis ar goad a meus scuillet
Var an douar ebars ar groas,
Ha deus bepret ato d'am c'haret,
Da recompañ a vezo bras.

Madalen.

Maro é Jesus, petra rin-me !
Bourrevien, c'houi a zo cruel !
Da viana va lazit ive,
Douç é din gant Jesus mervel :
Da daoulagad, deut da rêi daëlou,
Va c'halon, deut d'en em ranna,
Ha grit qement demeus a ganvo
Ha zin zouden eus ar bed-mâ.

Adieu d'am oll laouënidiguez,
Pa zeo maro Jesus bréma,

Ne velan nemred tristediguez,
E zer da vont de liena :
Deomp eta, ô va c'hoarezet,
Gant e Vam d'an interamant ;
N'en deo qet just e ve dilezet
Pa e deus brassa nec'hamant.

Eus ar sizun an devez qenta
E zimp mintin da vit Jesus ;
Evit ma ellimp lacat ountâ
Demeus an ongant precius :
Mes piou hon sicouro da lamet
Ar men bez a zo ponner bras ?
Ouspen e zeus laqet soudardet
Var e dro da zifen ar plaç.

Me vel penos ar men zo ruillet
Dôr ar bez ma edo Jesus,
Ouspen em eus aon ve transportet
E gorf gant tud malicius :
Ha qement ameus a nec'hamant
N'on petra meus da ober,
Pe me dle chom aman patient,
Pe mont d'e glasq dre ar c'hartier.

Daou Æl.

Petra c'hoarve dec'h greg, desolet ?
Ha den en deus grêt dec'h anui ?
Lavarit perac oc'h aflijet,
Ha ni a deui d'ho soulaji.
Arretit eun nebeudic ama,
Contet ar sujet ho clac'har,
Ha n'in o sicouro a vrema,
Mar gallomp, eus hon oll pouvoir.

Madalen.

Me meus sujet d'en em desoli,
Collet e meus va madou oll,
Ha n'ouffe den dont d'am soulaji,
Na dam c'honsoli eus va c'holl,
Nemet rêi a raffet d'in va Zalver,
P'ini zo diganin lamet ;
Me yel partout dre bep seurt amzei
Qen em bezo râncontret.

Petra zo gret da gorf va Zalver ?
Deut voan en esper e velet :
Lavarit din eta, Jardinier,
Ha c'houi ho c'heus an transportet ?
Deut oun da lacat ongant ounta.
Mar oc'h c'heus truez ouzin,
Lavaret d'in p'en andret e ma,
M'en liqin elec'h m'er c'hivin.

Jesus.

Va mignones Mari-Madalen,
N'am c'hlasp mui, cède me ama.
En em denn, ha pella diouzin.
Ne dlees qet touch ouzin brema:
Did oun en'em disquelan genta,
Evel ma oun deut eus ar bez,
Ne allan qet dont da resista
Ous nep am c'hlasp dre garantez.

Qé d'avertissa va zisqibien
Penos e zôe ressuscitet,
En despét gardou ar Judevien,
Pere voa laqet d'am miret:
Ha na chom qet hep avertissa
Ar paour qés Pêr oll desolet;
Evit me beza nac'het ganta,
E faut zo deza pardonet.

Ar Judevien.

Antreet, Lazar, Martha, Madalen,
Er vag-man gant oll tud ho ty,
Evit na sortiot biryiqen
En buez ermez anezi;
Ha c'houi, Joseph, deut enni ivez
Assambles gant ho consortet,
C'hoant hon eus e collec'h ho puez,
Hac e vec'h gant ar mor lonqet.

Lazar.

Unan a c'hanomp eme Lazar,
Zo gant Jesus ressuscitet;
Esper a meus e zaimp d'an douar,
Hep na vazo nicun beuzet;
Va c'hoarezet, Martha, Madafen,
Na gollomp qet a esperanc,
Goëchal e sonjac'h penos biqen,
N'em gueljac'h mui en ho presanc.

Madalen

Cetu-ni e Marseille éruet;
Va breur Lazar, sermon ar Feiz,
Ha me ya da glasq eur plaç secret
Da bedi Doue nos ha deiz.
En eun dezert e fell din beza,
Pell diouz peb seurt compagnunez,
Evit ma elli liproc'h gouëla
Qeit ha ma chomin en buez.

Piniñ Marie-Madalen en dezert.

Ar Pee'her.

Desert leun eus a bep seurt rigol

Ag a bep seurt tristidiguez,
Chenchit eta lod eus hoc'h horol
Ebars en laouënidiguez;
Ne velan nemet pep seurt anqen,
Pep seurt poan ha pep seurt tourmant
Preparet evit ar Vadalen;
Ne grédan qet e ve constant.

Madalen.

An dezert en pehini e hon
N'en devezs qet re a c'hrisder;
Er c'hrontrel é, n'en devezs evidon
Nemet memes re a souder:
Va c'harantez é, pa em angach,
Da chom ebars en eur groten,
Rac ar galon zo bet re volac'h
A gle caret ar binijen.

An AEL.

Me zo digasset ama pressant
A beurs nep a garit muia,
Dre ma oc'h eus calz a nec'hamant,
E default eur plaç da ouëla;
Me ho casso da eur plaç secret,
Ma veet qement a gostez,
Ma elfet mesqant gant ho regret
An daëlon eus ar garantez.

Ar Pee'her.

Lavarit, penitantes charmant,
Petra en eus hoc'h obliget
Da souffr qement all eus a dourmant
Var ho corf ha var ho speret?
Rag qement ho qoel hac hoc'h au ve
A zo ganec'h oll estonet,
Ha pa ho remerqont er guis-se,
E sonjont oll e zoc'h fo let.

Madalen

Pe me zo vil pe me zo charmant,
Qement-se n'eo qet oc'h affer,
Mes va c'halon en em gav contant,
Pa nê güir e plij d'am Zalver;
Ha c'houi ive, mar doc'h guir gristen,
Ha mar d'é ho calon touchet,
Sellit heppen ouz va finijen,
Ha list a gostez va guenet.

Ar Pee'her.

Pelec'h e ma ho servicherien?
Ne velan nicun var ho trô;

Perag e renoncet d'ar voyen
Abars ma zeo dent ar maro?
Renoncet oc'h eus da eur pales,
D'ar joa ha d'ar gontantamant,
Eguis ma vijac'h innoçantes,
Ha dibourvezet a sqiant.

Madalen.

Me a meus renoncet d'ar voyen
Ha d'an hano eus a vestres,
Ha ne meus mui a servicherien,
Ne meus na manoar, na pales;
Qemeret a ran eus a yreman
An hano a servicheres,
Ha c'hoas evurus en em gavan
Mar em bez lod gant an zelez.

Ar Pec'her.

Ar musq, ar ros hac an oll fleurion,
Ar bum assambles gant an ambr,
Nesantont get sur goëlloc'h c'hoëziou
Eguet ma santet en ho cambre,
Ouspen pa zoa ganec'h parfumet,
Ha c'hoas ornet gant fapissou,
Hac er groten-ma n'eller gueleit
Nemet qenvid ouz mogueriou.

Madalen.

Ne gredân get e cafet eur c'hraou
A sante ar c'houeziou mad-se
Ha couscoude Mestr an oll madou,
A choasas eur c'hraou da vele,
Ha n'en doa get a dapissiri,
Nemet hepgen foen ha colo,
Hac euri nebeudie lianennou,
Pourveet gant e Vam d'e c'holo.

Ar Pec'her.

Guechal ho pije compagnanez,
Hag e carac'h beza gueleit,
Hag ho prassa laouënediguez,
Oa gueleit dont d'ho darempret;
Ne garec'h get en em gaptiva
Da chom oc'h-uan en ho ty:
Penaas oc'h ellit-hu chom amâ
Pa na zeu den d'ho freqanti?

Madalen.

Mar e meus caret compagnunez,
Bremâ me zelest anezo,
Ha ma brassa laouënidiguez
Eo beza pell bras diouto;

Me a meus qemeret eur pried,
A chom ganen bepred amâ,
Ha nouffe den dont d'am darempret
Anes dont d'e zizoblja.

Ar Pec'her.

C'hui a lavar oc'h eus pried,
Ha na bella get diouzoc'h;
Gant qement-se m'em em gav souezet,
Rag n'en güelan get ganec'h;
Nemet dessin ho pe d'am zromplag
Ha rei din comzou da gredi;
Lavaret din p'en andrèt e ma,
Evid doned d'am c'hontanti.

Madalen.

Ar pried a meus a zo ama
Hag e lec'h all oll assambles;
Me ne fell get din dont d'ho tromplag,
Mes lavared ar virionez.
Va c'halon en deveus possedet,
Ha fidel e vezin dezan,
Na james n'a vezint eur momet
N'am bezo sonj eus anezan.

Ar Pec'her.

Diroji a rit d'ho qalite,
Ha chagrina qement ho car;
Ne ranqer get gouëla qement-se
Evit mont eur veach d'ar gloar.
Pelec'h e velit-hu ordrenet
Rei qement all eus a zaëlon
Evit hor pec'hejou tremenet?
Offanci a rit an Autro.

Madalen.

Me ne doun nemet eur bec'heres,
Hag a zeu d'o c'havertissa,
Mar oc'h eus c'hoant da veza eurus,
Sonjit d'en em gonvertissa,
Pa zeo guir nemet dre ar souffranc
Ne allomp pretanti repos,
Eo ret dont da ober violanc
Evit antren er barodos.

Ar Pec'her.

Ne quet red deoc'h beza quer presset
Da souffr eur binijen garo;
Re abret oc'h eus-y commancet,
List ma vezot tost d'ar maro;
Quemer a ellit c'hoas hoc'h amser

Ha dont d'en em rejouissa ;
En eur moment ec'h ellomp ober
Hor zilvidiguez er bed-ma.

Madalen.

N'ellomp james beza re bresset
Da repari hor pec'hejou ,
Alies hini zo en em dromplet
O credi eur seurt resoniou
Nep piou benag a ra er guis-se ,
Hag a zifer betec ar fin ,
En em rent dign a goler Doue ,
Hag eus a bep faveur indign.

Ar Pec'her.

Ne remerquer mui var ho pisach
Ar liou quer vif ha quer brillant ;
Na veler mui en ho taoulagad
Nemet eur regard languissant ;
Ouspen e zint casimant beuzet ;
Mar o list hep o soulaji ,
En bær amzer e viot souezet
Pa na servichint deoc'h mui.

Madalen.

Va frofit ve , nonpas eun domach ,
Em be collet va oll goelet ,
Pa na velfen birviquen james ,
N'em bezo morse a regret.
Nep piou benag a ra goal usach
Eus ar mad en deus recevet ,
En em laca ebars en angach
Da ober eur binijen galet.

Ar Pec'her.

Na tom na yen n'en devezs noazet ,
Na groet d'ho quenet nep domach ,
Ardeur an eol n'en deus quet poazet
Nag ho taouarn nag ho pisach ;
Eur parasol hag eun evantail ,
Eur mascl hag eur re vanegou ,
O pije bepret en aparail ,
Evit conservi mad ho liou.

Madalen.

Pa zeu din memor a guementse ,
N'allan quet miret da rusian
Gant mez o vœlet ar vanite
A galz a dud eus ar bed-man ;
Ar Werc'hez hag e mab , va Zalver ,
Q tee'hel araug an tyrant ,

A anduras rigol an amzer ,
Hep caouet nep soulajamant.

Ar Pec'her.

Güechal e teuac'h den em admira ;
Ma velac'h ar squed eus ho pisach ,
Ma selfac'h er mezellour bréma ,
N'en em anafac'h davantach :
Dre ar rigol eus ar binijen
Oc'h eus en laquet da sec'ha ,
Eguis an deillou eus ar vezen
Pa zeuont o-unan da goueza.

Madalen.

Me ne meus quet affer davantac'h
Da zellet bars er mezellour ,
N'e quet ar guenet eus va bisach
A fell d'am Mestr ha d'am Autrou :
Va c'halon en devezs goulennet
Ha roet em eus-en deza ,
Mes n'er c'haffe james preparet
Nemet souffr a rafen da guenta.

Madalen.

Evit mezellour me meus choaset
Va Jesus staguët ouz ar groas ,
Pihini , siouas ! a meus offanset
Dre bec'hejou hag a zo bras ;
Dre ma voan goechal bet quen volach
Da denna gloar eus va guenet ,
Mes Doue am miro davantach
Na goezin en eur seurt pec'het.

Ar Pec'her.

Ar bleo caer-ze pere a zouguit ,
Na servichont dec'h da netra ,
Na ne zigassint dec'h nep profit ,
Nemet dont a rafec'h d'ho guersa ;
Me vel e zint deja negligiet
Noc'h eus anezo nep sourei .
Ha couscoude o devezs plijet
En amzer ma teuac'h d'ho soigni.

Madalen.

Va bleo a meus atao conservet ,
Hag a rin epad va buez ;
Mar o deus servichet d'am pec'hed ,
Dam pinijen e raint ivez.
Gant ar parfum sac'r int parfumet.
Hag en deus eur c'huez excellent ,
Ne ouffen james o diouerët
Nag evit aour nag evit arc'hant.

Ar pec'her.

Pelec'h oc'h eus laquet ho perlez,
Biseyer, carcan, rubanou?
Habillet oc'h en guis eur baourez
Ne defe quet eus a vadour;
Rag ne velan brema semplamant
Nemet coz dillad var ho tro,
Ha noc'h eus quen evit ornament
Nemet bleo ho penn d'ho colo.

Madalen.

Me meus renoncet d'an oll perlez,
D'am biseyer ha rubanou,
Evit beza guir servicheres
Da vestr an oll berzelennou;
Nonpas ma ve pec'het o douguen,
Mar grær usach vad anezo;
Mes siouas din, Mari-Madalen,
Offancet a meus Doue dreizo.

Ar pec'her.

Noc'h eus quet eur guele da gousquet
Hag a ve dious ho merit
Ho corf tener zo voar ar c'halet,
M'e meus aon n'en em abrejtit
Guechal e couscac'h var ar c'hoton,
Ha brema ec'hoc'h var ar men:
Ma na guerit chench eus a feçon,
Edoc'h dija prest da dremen.

Madalen.

Me a zo en em digustumet
Diouz güeleou coton ha plun,
Hag ema a zonjit zo calet,
A gavan re douc ha re cun.
Evit plijout d'am muia-caret,
Eo ret din dont de imita;
Cousquet en devezs var ar c'halet,
Ha me rei ivez evelta.

Ar pec'her.

Pelec'h ma an amser dremenet,
M'o pije a bep seurt boejou?
Ha brema n'o cueler servichet
Nemet a vara ha louzou:
Ha noc'h eus evit oc'h oll breuvach
Nemet ebquen dour da eva,
Elec'h m'o pije vit oc'h usach
Demeus a liqueuriou güella.

Madalen.

Va Zalver en devezs bet yunet
Abalamour d'hor pec'hejou.

Ha ni en em gav importunet
Hoc'h imita e exemplou!
Eur c'horf so maguet dre licheri
Ne zent james eus ar reson,
Hag e zeo ret dont d'en em dompti
Dre ar yun hac an oreson.

Ar pec'her.

En divertissamanchou public,
Er bal, en danç, en opera,
O vont da glævet cana'r musiq,
E teuc'h d'en em divertissa;
Eus ho pemp squiantchou naturel
Ho pije pep seurt plijadur,
Hag e zoc'h deut brema quen cruel,
N'accordit netra d'an natur.

Madalen.

An divertissamanchou public
A zeu da noazout d'am ene,
Rag eus a chäst e teunt lubric,
Peb den zo daonet dre an gont-se,
Comedi, bal, danç hag an theatr
A zeu da chench speret an den,
Hag a rent ive memes idolatr,
Siouas! calz a grouadurien.

Ar pec'her.

N'o clever get o cana soniou
Evit en em divertissa,
Ha ne sorti mui eus ho genou
Nemet comzou ar santela:
Ouspen, lezet oc'heus an dançou
Elec'h m'o poa plijadurez,
Evit gallout rein huanadou
En eur plaç a dristidiguez.

Madalen.

Va zeod mar e deus va servichet
Evit meuli an aërouant,
Me velo en amzer da zouet
Ne vezo sur qen isolant.
Ar bal, an danç hac an nosvesio.
Va Doue c'houi a oar en oll,
Ma na rajen piniñ anezo,
A rafe din monnet da goll.

Ar Pec'her convertisset.

Goude qement a meus lavaret
O sonjal ho pervertissa,
Me vel e zon ganec'h gonezet,
Va c'halon n'ell mui resista;
Contraign on da chench eus a gomzou.

Ha da garout ar binigen ;
Me ziscouezo dre ma oberion
Penaos e zoun chenchet a grèn.

Ha cavet a ve eur femelen,
A guer cre resolution,
Eguis ma zeo Mari-Madalen ?
C'houi zo penitantes guirion.
Graçou bras oc'h c'heus digant Jesus
Recevet oc'h c'heus ar voyen.
Da renta ar bed, ar c'hiq confus,
Satan hac e servicherien.

Me a meus gemeret calz a boan,
Ha n'e meus netra gonezet.
Da servicha piou, nemet Satan !

Eur vez eo din e lavaret ;
Ha me a voa deulet gantan
Da zont d'ho teni, Madalen,
Ha c'houi zo bet trec'h din ha dezan
Ar pezh ne gredjen birviquen.

Madalen.

Na servichit james mui biqen
Eur mestr hag a so un tirant ;
Sulvui e servichit e lezen,
Sulvui e rei deoc'h a dourmant ;
Qemerit Jesus da gabiten,
Hag en em anrolit gantan,
Ha mar don-me Mari-Madalen,
En em gontantit aneza.

FIN.

